

CANTIK ZANT PER

TON : *Itron Varia-ar-Porzou.*

DISKAN :

*Otrou Zant Per, mignon Jezuz,
Ha Porjer braz an envou,
C'hui hon Patron carantezuz,
Sellet ouz hon ezomou !*

Ezomou ar c'horf a ve braz,
E kreiz trùbuillou ar bed,
Poaniou speret ve brassoc'h c'hoaz :
Ken liez e ve nec'het !

Nec'het e ve calon peb den
O klask bout euruz noz de,
Mes euruz mad na vo biken
Nemet o caret Doue !

Caret Jezuz a greiz-calon
Evel ma larec'h guechall,
Hag evel doc'h goulen pardon,
Ma ve, siouas ! un dra fall !

C'hui, men fond an Ilis zantel,
A hars ouz an droug-speret
C'hui a diouall ar bobl fidel
Enep an dud miliget !

Caër o devo skei ha iudall
Gant conar ha gant malis

Nan, birviken an dud fall
N'hallent distruj an Ilis !

Digant hon Zalver oc'h euz bet
Alc'hueou dor ar gonsians ;
Ho torn zo gallouduz meurbet
Enoc'h ema hon fizians !

Dre eur ger e ve dizamet
Bec'h poner ar galon baour.
Iac'h-pesk ve an ine blonset
Ha lugernuz vet an aour !

Gant hoc'h Alc'hueou burzuduz
C'hui digor ar Baradoz
Eno e veler gloar Jezuz
Eno ema o c'hortoz...

O c'hortoz he oll vugale
Crouet gant han vit ho mad,
Hag a glefe mont hep dale
~~De~~ tenn var du ti ho zad !

Tad Eternel, ni ho suppli,
Ni tamigou tud dister,
Groet ma c'hallimp mont d'ho meuli
D'ar Baradoz gant Zant Per !

G. M.,

T. J.

SJ

IMPRIMATUR :

Brioci, die 16^a novembris 1900.

M. LE PROVOST, vic. gén.